

GOUERZ

Voar sujet eur feumelen hanvet Lutherianes, condamnet d'ar maro, è vezan het belec hac assassineres.

Tostaet tud ancien, hac ive ied yaouanq,
Ma ispliquin dec'h un histoar a zo interessant,
Voar sujet eur feumelen, hanvet Lutherianes.
Dre ma zeo bet ganet, hep bezza christenes.

Quen evit avans davantag, me gant an histoar
E houlenau assistans, roue an énv hac an douar,
Da rei courag dam halon, ha lumiier dam speret
Da hallout expliquant ar vue, e bars en brezonec.

Guerches glories Vair, dre gair humilité
Non strinquan dan daoulin, dirac ho majeste
Da houlen ar c'hras, da allout ispliquan
Bue ar Lutherianes, hep donet da vanquan.

Lutherianes yaouanq, orphelines chomet
Quittat a ris ma bro, ma meus bet baleet
Gaisquet en habit pot, gant calis effrontiry
Me ye hardiamant en pep bro, hac ivé en pep ty.

Antren a ris un deves, e bars un noblans
Ma voa eni christenien, tud dimens a gonsequans,
Recevet mad gante hac ivé clouvet
Dre ma voant Lutherianes, a voant bet badeet.

Evel ma songe gante, e voant eur pot yaouanq
E bars en ano pot a recevis badeiant,
Ais otrou voa ma faëron, an itron ma maérones
Instruct e zon bet gante, e bars en santeles.

Jacques Certen, e zon hanvet gant an otrou person
Dre ma ignoret ma hano, quement ma zo guirion
Hano ma maërones, bac itron dimeus an ty
Evoa certanamant, marquises a Dolery.

Casset on bed dar scolgant cals a avantag
Ma speret e voa habil, ha ma squient e voa bras,
Ha dre ma querzen beinde en hent ar perfeetion
E voant recevet mad, gant an dud a gondition.

E bars ar golag vrás, a finissis ma study
Disquet ganin ar latin, hac an theologie
Recevet on bet belec, e bars en assurans,
Ma chomis pevar bla goude, viquer bars en oblans.

Laret a ren ma ofern bemde, vel eur belec sanctel
Assistans a mige, digant an dud fidel
Ma maërones am assiste hac ive ma faëron
Hac oll dud an ty, gant cals a devotion.

Mes penevert ma see quen mad madeles un Doue
Na non penos na digas an tan dimeus an env,
Da zonet da ecrasin, eur feumelen ingrat
A deu d'en attaquin, bete è dabernacl.

Goude ar pevar bla, quittaeis *ty* ma maërones,
Hac ive *ty* ma faëron, dre ma voant gante re es
O rein de da gridin moa prometet, mont en pelerinag
Da visitan plaço devot, gant eur santeles vrás.

Noufe den considerin, pe guen bras calonat
A nefoa ma mestro, ô tonet dam huittat,
Non boquet deze ô daou, a meus bet lavaret
Pa vije fin dam beag, teujen c'hoas d'o guelet.

Roet o deus bet din arhant evit ober ma rout
Ha quement a moa ezomp gant cals deus ar hirvout
Comans a ris ma hent, evel-se a la fin
Guisquet dinan un habit dimeus a belerin.

Ha dinan en ano dimeus a Jacques Certen
E valcis evel-se , ebars en pep tachen
Mes Doue ô vezan scouis , na houle davantag.
Soufr dimeus va feurs , outrag quen bras.

Fatig gant an nent , comprenet an histoar
Hantreis un novoes ebars neur prespitoar
Recevet mad memeus , gant an otrou person
O sonjal voant eur belec deus a profession.

An de voarlerc'h ar beure hoferrygnis mintin mad
O sonjal partian , ha quittat ar prelat
Goude ma ofern divin , a ris un instruction
Ma carguis ar barous a joa ag a admiration.

Goneet a moa ive confians ar person
M'am pedas da vezan e viquer , e qualite a vignon ,
Hoec'h mis a chomis neuse gant an otrou cure
Gant cals a gontantamant , en pad an amser-se.

Maes un deves goude , evel pa vige ma zad
A contis dezan ma doare , ag ive ma stad ,
Lavaret a reis dezan a voant faussamant guisquet
Ha ma voant eur feumelen , evel-se deguiset.

Ar person incredul , dimeus a guement-se
O credin penos voa evit en tromplan , a felle dime
Hapares ma bizitan , a voelas seler er fad
Ma lavaras neuse , e vije red din quittad.

Ober a eure din guisquan , un habit feumelen
Evit salut ma ine , a lavaras din evellen ,
Non gconvertissan a mezan cavet queun ha glaher
Dam sacrilejo infam cometet voar an douar.

Ma houlis ma vaperiou , a moa bet confiet
Bars entre e zaquarn , pa voant en e dy antreet ,
Ma respontas dime a té ave c'hoas capabl
Da gomettin sacrilejo ave quen execrabil.

Quet buan e mezau e mez démeus ma zy,
Rac leun out a valis , hac a ingratiry ,
Rac ar paperiou-se pere a reclamet
A gonservin bars em zy , queit ha ma mou buez.

Neuze tennis ma hontel dre ma voant colcret
O vezan deus ma faperiou , evel-se refuset ,
Tri dol contel neuse , a meus dezan roet
E bars en é galon , dan donar é het coeet.

Quemer a ris en tec'h mes arrettet e zon bed
Ha dar prison ractal , e zon bet conduit ,
Quemeret e zon bet , evit eur criminales
Evit punition dam c'hrimo hac ive sacrileg.

E bars ar guer a Rom gant justis condamnet
Da vezan e bars an tan , en beo distrujet ,
Hac evit testeni dimeus ma bue criminel
Ar ludu goude-se jettet bars an awel.

Doue bras deus an envo , distroet ho taoulagat
Ous eur vartires ques , pehini so miserabl ,
Ansav a ran ma fuit , gout a ran e zon coupabl ,
Goulen a ran pardon , dimeus a galon vad.

Quen evit finissan , da vezan distrujet ,
Dimeus ma fehejo , pardon din accordet .
Doue da rei ar c'hras dam ine , neiquet da gol
Dre vertu goat Jesus-Christ scuillet evidomp oll.

A c'hui pobl deus a Itali nancoet biquen
Ar fin trist dimeus à Jacquelin Certen
Pehini so bed assassineres , hac ive belec ,
Pedet evidomp oll , assistantet me ho ped.

Ar chanson nevez-man a so traduiset
Dimeus ar gallic , e bars en brezonec ,
Gaut un hostis deus a geste Goengamp
E bars er bla trivoach cant daou a banter cant.